

LIZER HERRI PEMP

D'EUR MIGNON D'EZHAN

Eveld'oc'h, ma mignon ker, me zo mantret ma c'halon o welet petra rer da Franz.

N'am euz ket eta ezom da laret d'ec'h e kemerân peurz enn ho tristidigez, hag ec'h ouzon ervad petra zo kirieg d'oc'h anken.

E Pariz ez oun ganet, ha kenta tenn zo bet losket var ar ger vraz-se, n'euz skoet eur c'hlaouen em c'halon. Truez am boa ouz ma bro; zivoaz n'hellan ket he zikour. Ha hirie c'hoaz evel neuze n'am euz d'ober nemet goela var eur brezel estranj ha kriz a rer da Franz gant Fransizien dinatur.

Mes o pet fianz, hon zoudardet kalonek a drec'ho.

C'houi a glev, var a leret, eleiz a dud euz pep kostéenn o komz diwar ma fenn. Karout a raffent gouzout petra zonzân, petra garfen, petra esperân!

Diszket d'he penn da benn ar zonzj am euz.

Leret d'he n'am euz ket ho zromplet biskoaz, ha biken na rin. Pedet ann-he enn hano ar vro, enn hano Doue d'en em unani entrez-he.

Na lezet ket ann-he da gredi e zellân Franz evel peurgollet, nag ive da zonzjal na c'houlennân ken en em garga d'he atzevel.

Franz a vo zaveteet pa c'houveo penoz al liberte n'eo ket ann diroll, ha pa na glasko ken d'he gouarn distoladenno hag a ra brao d'ez-hi da genta, da c'hortoz he c'has d'ann argoll.

Franz zo beo c'hoaz, evit-hi da veza guanet. Franz ne daï ket da goll; rag pa gastiz Doue annez-hi evel ma ra, e tiskouez penoz en deuz c'hoant d'ober gant-hi c'hoaz eunn dra bennag a gaer.

Zivoaz! al lezen wellâ hon euz torret, ze zo kirieg d'ar pezh a zo kouezet var-n-omp.

Eur vro gristen n'hall ket disprizout al lezen zantel gant pêhini eo bet keit amzer maget, anez mont var fallaat bemdez. Koueza ra euz ann eil lamm enn egile, euz ann eil revolution enn eben, da c'hortoz beza distrujet a grenn, evel kelliéz a rouantelez paian goechall.

Ar vro n'euz gouveet ze enn eur choaz d'he gouarn tud eveld'oc'h, leun a boell hag a skiant, a fe vad hag a religion.

Setu perag, ma mignon ker, enn despet d'ar falz kredenno zo chommet c'hoaz, enn Franz a ve c'hoant da gaout eur roue. Bet zo zivoaz breman awalc'h a skiant prena; ha na fier ken var ar revolutionerien da zigas ann treo da vad.

Kalz a c'hewier a lerer divar ma fenn, dislaret ann-hé, me ho ped, a voez huel.

Laret a rer, mar dan da roue, na c'houlennin kemer kuzul nag ali digant den.

C'houi oar n'eo ket ze a glaskan. N'am euz ken c'hoant nemet da boania da zével hon bro enn he za, ha da rei ho c'hrên d'ar re na glaskont nemet ar vad. Ar c'henta m'ac'h on euz famill rouané Franz, mar pignan var ann trôn, e kemerin kuzul evit gouarn ervad digant ar re vo choazet divar ar vro da zont d'am c'hichen.

Darn all a zonzj d'he na vo ket ingall an oll dirag al lezen, mar distro ar rouané var ho zrôn.

Leret-hu d'he ne don ket da ziski var gement sé. Na gavan ket mad ober muioc'h a stad euz ann eil evit euz egile, p'az eo gouir n'am euz c'hoant ebet ma unan d'enn em zével dreist ar re all. C'hoant avad am euz da voestla ma buez penn da benn d'ober vad d'am bro hep klask enor all ebet nemet enor Franz.

Laret a rer c'hoaz-penoz e karan ar Pap hag e rafen pep tra evit rei dez-han ann holl liberte en deuz ezom. — Enn dro-ze larer ar virionez.

Anez liberte ann Iliz n'en deuz na peuc'h er spe-rejo nag urz vad er bed. Difen ar Pap n'euz bet a viskoaz douget enor hag eurvad d'hon bro ha zavet annez-hi dreist ar broio all. Dilezel ar Pap zo bet evit-hi dre bep amzer droug-chans ha goall-eur.

Kredet ervad, n'eo ket hepken abalamour m'eo dleet ar gurunen d'in e vin galvet d'he c'hemer; mes dont a rin evit lakat enn he blas ar pezh n'eman ket, evit gouarn gant lealdet hag honestiz, digas ann urz vad, rei ho c'hren d'al lezenno, gwellaat ann droug zo groet ha rei ann tu d'ar vad zo d'ober.

Laret a vezo penoz e tougin barz em dorn kleve koz Franz, hag em feutrin eur galon a roue hag a dad evit ann oll. Na vin ket d'eur rumm muioc'h evit d'eur rumm all. N'am euz kasoni ouz den, na poan d'ober da zen, na fortun ebet da zével nemet hini Franz, ha gallout a rin choaz dre oll hag enn pep renk ar re garo ma zikour er garg diez ze.

Na zigan gan-en nemet ar religion, ann unvaniezh hag ar peuc'h, ha na c'houlennan beza dreist ar re all nemet evit ober vad da bep unan.

Setu perag, ma mignon ker, na gredan ket a ve peurgollet ma bro, ha perag na zouzan ket dirag eur bec'h hag a zo pouner.

Franz a lezân breman da laret he gir, ha Doue d'am gervel pa blijo gant-han.

HERRI PEMP,

8 Maë 1871.

Faint, illegible text in the top-left quadrant of the page, appearing as bleed-through from the reverse side.

Faint, illegible text in the middle-left quadrant of the page, appearing as bleed-through from the reverse side.

Faint, illegible text in the top-right quadrant of the page, appearing as bleed-through from the reverse side.

Faint, illegible text in the middle-right quadrant of the page, appearing as bleed-through from the reverse side.